

# AR PLAC'H LIBERTIN

## Exempl ha punition

*Eus a eur plac'h Yaouank, pehini e deus bet ar grueldet da laza he fevar C'hrouadur, condaonet da veza crouget ha devet er guer ar Roazon.*

*Var un ton nevez*

Speret Santel, m'ho ped da rei din al lumier.  
Ar c'hrac da composi eur wers spirituel,  
Eun exempl a zo gwal drisd hac eur melezeour patant  
Ma rei reflexion varnezi an dud yaouanc.

Er bloavez mil seiz cant ha daou hugent,  
An devec't a vis d'ù, evit rei da entent.  
En escopti a Roazon, en dreo euz a Zan-Cloda,  
Ec'h eruas eur maleur a ra dan oll crena.

Eur femeller yaouanc, a lignez enorabl.  
Eus a dud pinvidic, abers mam abers tad.  
A c'hanas daou vuguel. Er momet e voe tentet  
Da donet d'ho vouga, hep beza badezet.

O c'heuil eur c'huzul fall e kemeras eur bâl,  
E yas da gorn ar parq d'o fianta en douar ;  
Mes Doue o fel desan, en devezs bet permetet  
Dre eun aneval brutal e c'hin bet anavezet.

Retorn a ras d'ar guer da guz he fallenti ;  
He zad he remerca e c'houlennas outi :  
Va merc'h pelech oc'h-u-bet ; goal chenchet ho cavan  
Dious al liou a zougit em seblant ezoc'h clan.

Respont a ras e zad gant en indifferant,  
« Me a vezo exempl da galz a dud yaouank ;  
Va buez a verito beza partout publiet. »  
Mar rei reflexion varnezi calz a blac'het.

He zad e c'hlevet a ras reflexion  
War ar broposition a douche e galon.  
Ha possubl ve ta, merc'he ven quet ouz ho mezur,  
Em bet eur c'hrouadur da rei din disbljadur !

Da ben pevar devez m'a doa gret he zorfet,  
He zad a ya d'ar parc da guerc'het e lœned ;  
P'antreas voe estonnet o velet eun aneval  
E tennan daou vuguel er mes eus an douar.

Euz a zeiz crouadur e deuz bet va fried  
Ne meus nemet unan, oun ganti glach'aret.  
Lavaret mat e voa din em bije sur calonat  
Diouz va merc'h libertin, abred pe divezat.

Redec a ra d'ar guer neur goler a vrassa<sup>a</sup> ;  
Ma quemeras eun hach, en avis he laza,  
Me songe squei ganti: eun ael mat e inspiras  
D'arreti e goler hac e verc'h a zec'has.

Quitat a ras an ty da vit he daou buguel  
Hac o facas o daou ebars he devancher,  
Hac en em rentas gante e ty n'autrou Senechal  
Da zisclera dean he sorfegou barbar.

An autrou pe c'hlevas a voa bras estonnet<sup>l</sup>  
A chomas ouz e dol evel eun den mautret.  
Ar bluen demeus e zorn a gouezas crac diganta  
Pa vel an daou vuguel e commanç da vouela

Penos, miserables ! ec'h eus bet ar galon  
Da laza daou vuguel. hep caout compassion.  
Eur punition guel vras ac'heus ta meritet.  
Hac a vo hep dale oc'h enep prononçet.

An autrou Senechal a gomand d'eu serjant  
He laquat er prison neuze souden vatan  
Er guer demeus a Roazon ha dindan seitec devez  
E voa gret he jarret ha juget he froces.

Par voa interroget ar justic a estone  
O clevet ar plac'h-e tiscleria he bue.  
O velet pegeur secret dul'che e oll c'hrimou  
Nemet puissanc Doue n'aneves anezho.

Eus a bemp crouadur a meus laquet er bed  
Nsmet unan zo beo : pevar e meus lazet ;  
Den sur n'en deveus sautet va oll c'hrimou execrabl  
Neme sur un daou-ma en deus gouezed va zad.

Ar c'henta, men, ganet e quichen qer Vitre  
A dolis er rivier, pa voa ganet gane.  
Hac en eil e voa maro a ben ma denas er beq,  
A blantas er pern teil en parc va amezec.

A nemet en dreda zo chomet en bue ;  
Entre Kermaria e vœ ganet gane.  
Er c'hasis prest dar porchet hac eno e voa cavet  
Gant daou zen ancien o tremen ar veret.

Neuse veza condaonet da veza divisquet  
Laket en e he eun ivis roussinet  
Ha an amand enorapl rankas ive d'ober  
Gant un torch allumet dirag ilis Sant-Per.

A dan ilis Sant-Per betec ma vœ rentet  
En quichen ar potanc true voa e c'hlevet  
O ouela o teplori, o c'houlen digant Doue  
Eus a gréiz e c'halon barados d'e ene.

Cris vije ar galon en Roazon na ouelje.  
O clevet ar plac'h-man penos e presegue  
Ha ba biguas dar potanc e c'houlezna an amzer  
Do instrui yaouankis he asiste da varvel

## REFLEXION

Entrezoc'h, tud yaouank, kement zo o clevet,  
Comprenit ar maro zo qin-me preparet ;  
Evit va oll bue fall ha va disoeissanç,  
E ranqua mervel mezuz ziouas, euz ar potanç.

Me zo eu plac'h, certain hag a voa clevet mat,  
Disquet e pep feçon gant va mam ha va zad ;  
Demeus a zeiz crouadur int am c'harie ar muia :  
Me ra brema deze va o zreid dizec'ha.

O ren va unec vloas e vœn-me recevet ;  
Gant person va ferres, gant enor ha respect,  
Da ober va c'homunion etouas ar vugale ;  
Pemp bloas e vœ meus bevet en carente Doue.

Da ben va c'houezec uloas e vœ bet debochet  
Gant diou blac'h libertin hac o c'hamaradet  
Ma yen-me gante bem nos ho dar bal ha dan da  
Va mallos a roan gant en nep c'heuillo.

Tadou ha c'hui mamou, mestrou ha mestrezet,  
Instruit ho pugale hac o tomestiquet,  
N'o lezit quet da vonet da beb seurt assemble  
Na vezo tud honest en campagnugnez gante.

Mes zo hirio, sivo is, m'lesour digor franc :  
Diouallit diouz ar bed, entrezoc'h plac'het yaouanc.  
Pedit Doue d'ho sicour, hon vam sac' ar Verc'hez  
Da bellat peñ diouzoc'h ar goal gompagnunez

En em recommandi a ran d'ho pedennou :  
Pedit Jesus, dre e c'hraç dam receo er joayou ;  
Mont a rankan dar maro dre meus e meritet  
Pardon a c'houlennan ouz quement zo o clevet

Quitat ran ar bed-mam ; leun a di-stridiguez.  
Va Jesus adorabl, ho ped ouzin truez !  
Mervel rin eus ar potañ ha va c'horf vo devet.  
Al ludu anezhan gant an avel vo strinquet.

Comprenit 'ta va buez etrezoc'h, bugale  
Obeisit d'ho tud abalamour da Zoue,  
Hac e vezot sur eun deiz, oll da vea curunnet  
Gant Jesus, en e c'hloar e pales an Dreindet.

